

DEZRVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

*O paouez distreiñ deus broioù an hanternoz gant hor bag e oamp, ha setu-ni koñfinet, bac'het er gêr !
D'ar seitek a viz Meurzh e oa, hag an heol da skediñ brav en oabl.*

Emaon o chom e Mes-doun, Kerbêr, ha da gentañ-tout e oa plijus din adkavout va rannidi ha tout an traoù am boa laosket war ma lerc'h.

Dre chañs, n'eo ket divalav tamm ebet ar gweledva (morlenn Brest), ha n'on ket skuizh james da sellout outañ. N'emañ ket gwall bell an aod kennebeut ha moaien a zo mont da redek ha d'ober un tro-karter gwech ha gwech all.

Da c'houde, iskis eo an aergelc'h memes tra : n'eus karr ebet ken barzh ar straedoù, den ebet o pourmen... Ha gant an ti-bara a zo deuet war-wel ur ritual nevez : tud o c'hortoz er-maez, war riblenn an hent, ur metrad etrezo...

A-benn ar fin, n'eo ket displijus ar mare-se peogwir eo ur seurt ehan evit an Natur hag an dud, pezh a ra vad a-wechoù !

Tangi (deskia d e SKED)